

— 4 —

AN TRI GEMENER

Tri gemener a Laniscat,
 Mantigedigedige mantigedon,
 Tri gemener a Laniscat,
 A deu davedon da wriat — Chetu,
 A deu davedon da wriat.

M'o ant ket arru mad ebarz an ti,
 O deuz goullet o dijuni.

Triwec'h dousen grampoez hag unan
 'Deuz debret ar gemenerian ;

C'hoaz 'lare ar braz d'ar bihan :
 « Kamaradik, n'oun ket c'hoaz lân. »

Na oa ket unnek eur 'met a-boan,
 'Oa êt ar podfer braz war an tân.

Na triwec'h lur gik ha ter zorz poaz
 O deuz debret an tri c'horf braz.

C'hoaz e lare ar braz d'ar bihan :
 « Kamaradik, n'oun ket c'hoaz lân. »

Na digoret ket d'ê kled ar park braz,
 Ma yei ar gemenerian ebarz.

(Roet ha kanet da *Groaz ar Vretoned*
 hant an Otro Le Du, Calanhel).

AN DILOSTAN 'R WIZ

En Landreger eo deut ar c'hiz
 Da redek holl warlerc'h eur wiz,
 Kenkoulz bourc'hizien ha noblans,
 O Doue ! pebez dismegans !
 Holl 'deuz laket o flijadur
 'Barz en c'hoario ken kudur.

— 5 —

DISKAN.

*Manturlu fanfurlu lurette won wik,
Win waon hōc'h hōc'h hōc'h hōc'h,
Manturlurette rou lon la,
Manturlura.*

Kri 'vije 'r galon na ouelje,
A lavar d'imp mons Gwenole,
O klevet ar wiz o skrinjal
Arōg eur vanden tud brutal
Pere na anaveent ken
An otro maer hag e zeien.

N'am euz ket ezom da c'houlou
Kelo a Berik an Dogen ;
Aboue 'n euz gret nemet gouelo
D'e loen paour p'hini 'zo maro
Euz ar fêson an euzusan
A oufe den imajinan.

Breman, mar 'peuz c'hoant da glevet
Gant lost ar wiz petra zo gret,
Kaset eo bet da Arago,
Herve ma toug ar c'heloio ;
Gant al lost-man, an den gwiziek
'N euz gret eur stereden lostek.

Breman, p' eo maro Arago,
Piou a lenno 'barz an astro ?
A ! ma karjec'h, Landregeriz,
Bean bet miret lost ho kwiz,
N'an ije ket 'n em danfoueltret
O stagan lostou d'ar stered.

(Roet ha kanet da *Groaz ar Vretoned*
hant an Otro Guillou, person Plourac'h).